

D'an 12 a viz Kerzu 2013

Al labour-douar, un elfenn a bouez eus ar vreizhadelezh

« Labour-douar » : labour an douar. Gant an droienn uhel-se e weler penaos e vez komzet eus gounezerezh e brezhoneg, ur yezh dibar anezhi. Dibarderioù hervez ar c'hornadoù-bro pe gouiziegezhioù diaes da dreiñ a vez adkavet hiziv an deiz evit diorroadurioù a zere gwelloc'h hag a zo mat war dachenn an armerzh. Gouzout a reer ivez pegen pouezus eo roll al labourerien-douar evit treuzkas sevenadur Breizh hag evit diorroadur hollek ar rannvro. C'hoant o deus « Labourerien-douar Breizh » da greñvaat an unaniezh-se etre sevenadur ha labour-douar.

Al labour-douar e Breizh a c'hoarvez eus 68 000 a baotred hag a verc'hed a labour en holl c'hennadoù a ya d'ober pinvidigezh ar rannvro : greanterezh, servij, kenwerzh, artizanerezh, touristerezh, sevenadur... Pledañ a ra gant 5 tachenn a bouez : ar boued, an armerzh, ar gevredigezh, an endro hag ivez ar sevenadur.

Sevenadur Breizh a zeu dreist-holl eus ar maezioù pe eus bed ar beizanted. Penn a-raok brud ha hoal ar rannvro eo hiziv an deiz. Ar « fest-noz », anavezet hiviziken e glad bedel an UNESCO, a oa en deroù ur fest vras a veze kaset en-dro e fin al labourioù stroll evel an eost. M'en deus tapet sevenadur Breizh brud en-dro ez eo peogwir o deus gouezet al labourerien-douar, a-hed ar bloavezhioù, a remziad da remziad, gwareziñ ha treuzkas ar glad-se. Ar Vreudeur Morvan, anezho labourerien-douar e retred ha mistri war ar c'han-ha-diskan, zo testoù bras eus an unaniezh « labour-douar-sevenadur rannvroel »-se.

Hiziv e adkaver holl binvidigezhioù ar brezhoneg. Boazioù kozh n'eus ket mui anezho, evel-just. Anvioù-lec'h hag anvioù teknikel a-leizh, koulskoude, a vez eztaolet gant ar yezh dibar-se, lorc'hus hag ivez modern-kenañ a-wechoù, ur bam ! Un doare-ober eo pep yezh evit dielfennañ ha korvoiñ reishoc'h al lec'hioù. Mikael Madeg en deus diskouezet ez eus bet roet un anv da bep karreg e Bro-Leon evit pesketa en un doare efedusoc'h. An dra-se an hini a vez gwelet e bed al labour-douar gant anvioù al logelloù-douar da skouer (Toull ar pri, Traoñ an dour, ha me 'oar-me) pe ar boazioù a zere mat-kenañ evit druzañ kornadoù diseurt.

Bezañ gwriennet er vro hag en identelezh zo bet hollbouezus ivez evit ar roll c'hoariet gant al labourerien-douar e diorroadur hollek Breizh. Evel-se, en tu all d'ar produiñ boued ez eo bet al labourerien-douar luskerien alies evit ar mareoù bras pa oa bet digoret hor rannvro : steuñv hentoù Breizh, ar gompagnunezh Brittany Ferries... En ur mare ma teu an askorusted padus war wel dre un unaniezh etre an emzigeriñ hag ar gwriennañ, e fell da Labourerien-Breizh bezañ e penn a-raok al lañs-se. N'emañ ket an amzer dremenet a-dreñv dimp. Dindan hon treid emañ. Fellout a ra da Labourerien-douar Breizh, dre dalvoudekaat hon dibarderioù, meskañ an hêrezh gant ar vodernelezh evit bezañ efedusoc'h bepred.

Evit merkañ al liamm start-se etre breizhadelezh ha labour-douar, Labourerien-douar Breizh a ra bremañ gant ar brezhoneg evit hec'h anv, he logo hag hec'h embannadurioù. C'hoant he deus ar gevredigezh, pedet gant ar festivalioù bras evel an Erer Kozh pe Festival Etrekeltiek an Oriant, da greñvaat an eskemmoù etre al labourerien-douar hag ar Vretoned.

« Labourerien-douar Breizh », krouet e miz Gouere 2012, zo ur gevredigezh a fell dezhi bodañ an holl re ez eo al labour-douar ur benveg pouezus evito evit kas an traoù war-raok er rannvro. Bras eo hor youl : adreiñ lorc'h d'al labourerien-douar ha broudañ ar Vretoned da gaout anaoudegezh evit an holl draoù degaset gant al labour-douar d'ar rannvro. Pal hon obererezhioù eo adreiñ ar gaoz d'al labourerien-douar hag aesaat ar c'hendiviz gant ar Vretoned. Gant « Labourerien-douar Breizh » e oa bet aozet an dalc'h kentañ eus an devezh broadel « An holl d'an Ti-feurm » d'ar 16 a viz Mezheven da skouer. 15 000 Breton a oa bet o welet an 21 a diez-feurm o doa digoret o dorioù en deiz-se. Tost 60 a embregerezhioù hag a aozadurioù eus filierenn al labour-douar hag ar gounezvouederezh a harp an difrae-se ha 30 000 a labourerien-douar zo dileuriet dre ar c'hevelourioù hag ar strolladoù emouestlet er raktres-se.

Darempredoù gant ar c'hazetennoù

Jean-Paul Le Métayer – Pgz 06 08 90 79 45

contact@agriculteurs-de-bretagne.fr - www.agriculteurs-de-bretagne.fr

